

Trema an inizi

A-vil-bell eo bet broudet mab ha merc'h-den get an c'hoant da vonet pelloc'h, da dizhout lec'hioù nevez. Kredapl e vehe hon anien, spesad aloubus ac'hanomp ! Hiniv e venn lod sostiñ sol ar morioù pe monet da blanedenn Veurzh, met da vare ar Ragistoer o doa gellet an dud gober beajoù ker souezhus ha ken dañjerus evel pignat get ar menezioù (menezioù an Himalaya a vez darempred get an dud a-werso bras, da nebeutañ 500 000 a-raok J.-K.) pe gerzhet pell a-barzh teñvalded ar groc'hoù. Er pennad-mañ neoazh e vo penngomz ag ar morioù. Hep metal, hep lien, hag hep hor gouiziegezhioù modern o doa gellet an dud kavout ha poblñ Aostralia, a-wael, 50 000 blez kent J.-K., un taol-kaer !



Ur gartenn eus Kiprenez.



Livadur àr roc'h en Alta, kontelezh Finnmark, Sveden.

tostoc'h deomp e klask an arkeologourion anadoù ag an dud kentañ e Kiprenez er Mor Kreizdouar. Poblet e vehe bet get tud àr-dro 11 000 kent J.-K. Ne oa ket ur veaj dister naket rak nend eus ket a weled d'an enezenn ha pa vezer àr an douar-bras. Penaos o doa graet enta ? Àr hir amzer e oa bet an traoù, en em lakaet e oa an dud da besketa da gentañ hag a-nebeudigoù, a rummad da rummad, o doa tapet un tamm skiant martolod ha diàr-se o doa anavet gwell ar morioù-se, kent gellet kavet ha trevadenniñ an enezenn didud-se.

➤ “DISTUMMET” AN INIZI GET AN DUD

Ouzhpenn daremprediñ an enezenn o doa graet, distummet o doa o bro nevez en ur zegas spesadoù gouez daet a goadoù an douar-bras gete àr o bagoù (evel ar moc'h-gouez pe an demmed). Kement-se a oa e-raok amzer ar sevel loened, met diskouez a ra penaos e klaske an dud kemmiñ o endro evit ma vehe spletusoc'h ha magusoc'h dezhe. Loened gouez arall a oa bet degaset, met hep gouiet dezhe ar wezh-mañ, evel ar logod. Deskus eo kement-se a-gaoz ma tiskouez e oa bras

a-walc'h o bagoù evit ma vehe tu d'ar loenedigoù-se kuzhat. Korf logod an enezenn n'en doa ket kemmet da c'houde, pezh a ziskouez e veze degaset logod nevez daet ag an douar-bras lies (bep daou vlez da nebeutañ), mod arall e vehe bet “efed an inizi” àrnezhe hag o dehe emdroet tamm-ha-tamm en ur mod arall (brasoc'h pe bihanoc'h evit ar logod arall).

➤ BAGOÙ DIANAV

Aostralia, Breizh-Veur, Japan, Eusa, Korsika, Kiprenez... Ne ouier ket penaos e oa bagoù Oadvezh ar Maen met goût a raer mat o doa tud an oadvezh-hont redet ar morioù gete ha pell a-ziouzh an douar bras. Komprenet o deus an arkeologourion e oa bras a-walc'h o listri evit taliñ douzh an donvor ha degas familhoù ha loened gete, ha stank e chome o darempredoù get tud an douar bras.

Anton Châtelier

Evit gouiet pelloc'h : *Pré-histoires, la conquête des territoires* get Stéphanie Thiébaud ha Jean-Denis Vigne, embannet get Le Cherche-Midi (2018).